


Landudal

8N2-2-021

18. Meur a iliz, meur a chapel,  
A vez gwelet, e Breiz-Izel,  
Gant hon Tadou savet gwechall,  
Da enori Sant Tugdual.
19. Aman iveau eur chapel goant  
'Zo bet savet evit ar Sant :  
Ni holl enni 'dle daoulina  
'Vit e bedi d'hor benniga.
20. O Sant karet diwallit mat  
Ho pugale 'krez ar stourmad ;  
Grit ma c'hellimp, en ho kichen.  
Meuli Doue da virviken.

BASTIEN.



Imprimatur :

Quimper, le 11 Juin 1930.

P. MESSAGER.

Vic. gén.

Kemper, Moullerez ru an Dudchenil,

## Gwerz Sant Tugdual.

Ton reizet gant an Ao. Mayet.

2/8

Sant Tug-du - ai a zo be - pred e Lan-du -  
dal ka - ret meur - bet. Nep na gar ket Sant Tug-du -  
al, hen-nez n'eo ket eus Lan - du - dal. Nep na gar  
ket Sant Tu - du - al, hen - nez n'eo ket eus Lan - du - dal

DISKAN :

*Sant Tugdual a zo bepred,  
E Landudal, karet meurbet.  
Nep na gar ket Sant Tugdual,  
Hennez n'eo ket eus Landudal.*

1. Sant Tugdual a zo ganet,  
Eus a lignez ar rouaned,  
Ebarz ar vro hanvet Breiz-Vras  
Kelc'het, c'houï oar, gant ar mor glas.

2. Kaout a reas, 'harz e gavel,  
Eur vamm gristen 'vit e sevel :  
Rak koupaia, e vamm garet,  
'Oa eur santez, ret eo laret.
3. Eürus, eürus ar vugale  
O deus eur vamm hervez Doue :  
Deski a reont war e barlenn  
Penaos gounit o c'hurunenn.
4. Tugdualig abred, abred,  
A zispriajaz madou ar bed ;  
Met 'vit beza santeloc'h c'hoaz,  
'Neur manati en em dennas.
5. Heulia 'reas hep damanti  
Reolenn striz ar manati ;  
Dre ar rusta pinijennou  
E kastizas e wall dechou :
6. Chom hir amzer gant ar bedenn,  
Kousket nebeut war dri blankenn,  
Labourat start, yun didruez,  
Setu ar reiz eus e vuhez.
7. An ankou mut hag hep lagad  
A ziskaras an Tad Abad.  
Raktal, da ren ar venec'h all,  
E voe hanvet sant Tugdual.
8. Dont a reas, prestik goude,  
Da Vreiz-Izel, war urz Doue,  
Gant he vamm vat, he c'hoar Seva  
Ha diskibien eus ar fura.
9. Piou 'lavaro pet gwech e Breiz  
E prezegas lezenn ar feiz,  
Ha pet burzud a c'hoaryezas,  
Dre gement lec'h ma treinenas ?
10. Piou 'lavaro pet abati,  
Pet ospital, pet peniti,  
A voe savet, hep dale pell,  
War e c'houlenn, e Breiz-Izel ?
11. Sant Tugdual a dremene  
An darn vuia eus e vuhe  
En eur gouent etre diou ster,  
E lec'h m'ema kêr Landreger.
12. Goude maro eskob ar vro,  
Pobl ha roue, hoñ war eun dro,  
A wir galon a lavaras :  
« Ret eo d'ar Sant mont en e blas. »
13. Klask a reas pellaat ar bec'h,  
Met n'hellas ket kutuilh an trec'h :  
Goude gouarn eun abati,  
E rankas ren eun eskopti.
14. Betek neuze kêr Lexobi  
A oa kêr-benn an eskopti ;  
Met Tugdual 'reas ober  
Ar ger-eskop e Landreger.
15. Evel eskob e kendalc'has  
Da vale striz war hent ar groaz,  
Ha da hada, dre e gomzou,  
Greun mat ar feiz er c'halonnou.
16. Burzudou bras, gant gras Doue,  
'Chelle d'ober e pep mare,  
Betek lakaat eun den mervet  
Da sevel beo eus e arched.
17. Pa voe galvet gant e Salver :  
« Deuit da repoz, gwir servijer, »  
E kimiadas diouz ar bed-man ;  
Er baradoz ema breman.